

CANOUEEN NEVEZ,

Composet er blavez 1855, voar sujet an daou *Impalaërdet* a
Franc, a principalamant en Eloj He Vajeste **NAPOLEON III.**

Héritier du grand nom de ce fils de Bellone,
A qui la France dut la gloire et le bonheur,
Oui ! ton illustre sang mérite bien le trône :
Voix du Peuple et de Dieu te proclame Empereur !

MARTIN,

Secrétaire de la Mairie de Tonquédec.

Voar ton : *Chanson Cloarcc Paimpol.*

1. Meulomp hac admiromp soureci ar brovidanç,
A neveys hoas fixet destinadurez Franc !
Contre en pehini lest ar Gouarnamant
A oa sûr exposet da eun naufraj patant.

2. Nebcut profitabl eo revolutionno;
Golo reont ar bed a grim a dizurzo;
A hent all, difficil eo dont d'ho honjari :
Biniguet eo an heur ma teuont da cessi !

3. Mar zo den incredul, consultet an histoar,
Hac a vo he galen mantret gant ar glac'har
O velet ar vertu dre oll persecutet,
Hac o consideri furor an tyrantet !

4. Gret a deus ho fossibl vit gallout distruja
Ar Fe, ar Religion, treo ar honsolanta :
Dominet dre orgouil ha profit personnel,
A rent promesse faus, gant hoant da n'eum sevel.

5. Ha sonjal a rent-by oa ar bopl sot pe dall,
Hep gallout distingui ar mad demeus ar fall ?
Hema, vit choas mestro, a glasq sicour Doue,
Quentoc'h vit adori gouën al *Liberte*.

6. Deus ar pez a laran remerquomp ar breuven
En faveur Bonapart a doug ar gurunen :
Dre c'hraç an Eternel ha souhêt an nation,
Den providantiel eo pignet voar an trôn !

7. Madobero ar Prinç zo eur mezellour scler
Vit justification he titr a Impalaër,
Proclamet en public e pad he veajo,
Confirmet dre ar vot, ebars ar paroujo.

8. Hep pretanti tremen evit eun den savant,
Me declar a voa dign da veza President,
Hac a oa respectabl mouëjo an nation,
A gonte evita neuse hoc'h million.

9. Penos jugi brema eil choas ar Francigen ?
Ansavomp, memeus tra, a zeo gant sclerigen
A deveus hoas da Louis, vit an Impalaërdet,
An nombr ho suffrajo aû drederen cresquet.

10. A héno franc eta, criomp : *VIV' L'EMPEREUR !*
Ar Prinç-ze a gar Franc, a desir he bonheur :
Continuomp deza hon anondeguez vad,
Ha graç na rancontro birviquen den ingrât !

11. Quemerpomp assurans, era eo ar pilot
Pehini hon rento, hep drouc, voar vord an nod !
Publiomp deus he beurs rén ar peuc'h, ar bara,
Non pas, evel guechall, canerien : « *Ça Ira !* »

12. Amzer ar guillotin hac ar Broscription
A choaze victimo en peb condition :
O regim sponrennus, carguet a vassacro,
Napoleon Quenta a ro did ar maro !

13. Petra brometes-te, bla eis-ha daou huguent ?
O Republic nevez, chanch a res-te a hent ?
— Da brincipo subtil, privet a fondamant,
A scuil er sperejo doutans ha nec'hamant.

14. Tro hanter cant vla zo, Napoleon ar Bras
Ar memeus principo en Franc a discaras :
Meurbet eo surprenant ! Napoleon Trivet
A neveys aneze eun eil guech ranverset.

15. Personnajo quen rar, ze na gontest nieun,
Ve suscitet ato, vit ar bonheur commun,
Vel eun eil Moyses, vel eun all Josue,
Da delivra ar bopl deus a gaptivite.

16. Napoleon Quenta, ô hano immortel !
Houi force da grenn ar bed universel !
Lezenner caër, leal, vaillant ha generus,
Ouspen conciliant ha hoas religius.

17. Houi sav, a nevez flam, an Anter hac an Trôn;
A digas dimp an urs, ar peuc'h, an union :
An oll buissanço, en Europ en antier,
Gant ampressamant vras, a salud ho pannier !

18. Ho rén a zo hadet a laure hac a bloar;
Ho puez neus ornet pageanno an histoar :
Dre lizerenno aour peb generation
A retraço ané gant joa en he galon.

19. An contr hac an niz gant dorn Doue merquet
Da hoari eur roll bras a oa predestinet :
Mil action a braç, Roue ar Firmamant,
Vit bout dé confiet pen ar Gouarnamant !

20. D'an Impalaër nevez benos mam, benos tad !
Da abujo ar vro e livr brassa combat;
Diminuet a neus contingeant an arme :
Ar vot universel a retablis ive.

21. Crenvet a neus poliç an hostilirio ;
Da sul ha da voël bers serret al labourio :
Pebeus souten a ro d'ar vertu, d'ar moral,
O tont da reprima an disurz, ar scandal !

22. Cant ha mil dessein sot, mil unvre diréson
Enep ar mad public hac ar bossession
A neus cedet ar plaç da gouraj, da brudanç
Ar prinç Napoleon, idol ar bopl a Franc !

23. Dent eo da rei buez da bep transaction,
O tenna deus ar be substans an Nation,
Ar honverç oa pare, an arc'hant oa cuzet ;
Collet ar gonfianç en pevar horn ar hed.

24. Eun den a sacrifici ha prestij he hano
A neus, en ber instant, chanchet creun faç ar vro ;
Elec'h càt diénez, a zo prosperite :
Elec'h desunion, zo brassoc'h carante.

25. Da bion oc'h dleourien, artisan, labourer,
Mar deo roet an tec'h d'ho chagrin, d'ho miser ?
— D'ar mortel barzudus ho toug en he galon :
Quenvrois en antier, da Louis-Napoleon.

26. Na vet muí quen spontic rac dorn an usulier
A oa caus da revin an dud en peb quartier :
Seiz banc credit foncier, deja autoriset,
A bresto dec'h metal, voar gondition çzet.

27. Sauf hypothec a po, herve ho peadra ;
Tam ha tam a varvo ho dle bars ugent vla,
Ha voarben hanter cant, d'an diveza termen :
Quement-ze, a dra sûr, so commod da bep den.

28. Dre terrouer ar Franç ped linen hent houarn
Hirie, devejerien, a occup ho taouarn,
O chasseal an naon hac an necessite,
O procuri labour, ésanç, moralite ?

29. Sir ! Quenlies andret a heus bet visitet,
Eao heus ordinal ar fleurio meritet :
Houi soulaj ar viser, orni ret liso,
Ha d'an dorfetourien ec'h accordet graço.

30. Dreizoc'h zo decretet amnisti general
Vit an desertourien ha nombr deus a dud all :
Abd-der-Kader memeus d'ho generosite,
Couls hac he suit, a dle fin he gaptivite.

31. Ouspen, er gapital, tri etablissamant
Vit ar bartierio paour a ret gant hoc'h arc'hant ;
Rentet a heus d'ar bult lhis ar Pantheon :
Admiromp madelez Louis-Napoleon !!!

32. Maro peorien Paris oa trist ha desolant,
Faut a ceremoni gant ho enterramant :
Brema, vel ar pinvec, a deveus pedenno,
D'ho sicour da bignal ebars squeul an Envo.

33. Combaterien glorius demeus a Waterloo,
A Wagram, Austerlitz, Iena, Marengo,
Mar manc dec'h recompans justamant meritet,
Reclamet, hac a vo ho goulen accordet.

34. Pebens invantion er guer Imperial
Vit peb particulier ha tout ar general !
Digor franc eo Luteç d'ar petitionno :
An oll, er homite, justie a obteno.

35. En tuont scrijo caër bete hent ignoret,
Evit renta hommaj d'an talant, d'ar speret,
Ha formi monumant en gloar an nation,
A gafe en Paris eur guir reception.

36. Merdeadet a Franç, lest ho tristidiguez ;
En ho campagnio hir ar religion james,
Mar queret profita, na rayo dec'h defot,
Aumonierien a po, tost, ha pell deus an nod.

37. Bugaligo cavet bars an hospitalio,
Livret d'an abandon abeurs ho famillo,
Evit ho telivra Louis-Napoleon
A gont daou hant mil livr, bars en pur donézon.

38. Eur bapiti ac'hanoc'h a vezo destinet
Da beupli an Afric, vel ma zeo arrêtet ;
Ho stad vo evurus, hen credet fermamant :
Bezit anoudeguez d'eur sort Gouarnamant.

39. Examinomp decret mis guénver aboue bla,
Da velet vit petra eo ordrenet guerza
Eul loden disponibl deus dōmen an nation
Estimet, tu pe du, daou ugent million.

40. Dec million a rër d'ar societo
A sicour mutuel herve al lezenno :
Memeus som vit guellât logeis ouvrierien,
Er herio bras ma zo manufacturerien.

41. Quement all a roer vit ar hredit foncier,
En departemancho elec'h m'ho goulenner ;
Pemp vit ar velleyen dibourve, incapabl,
Piou a refus crial : *Destination meulabl !*

42. Soudardet a bep grad, vit an donar, ar mor,
Pere neus servijet gant couraj, gant henor
Hac a verito hoas bout legionnerien,
Voar ar pez a vano a vo partagerien.

43. Galeour miserabl, condaonet d'ar chaden,
Scanvet a vo da vec'h ha doucêt da anquen :
Quasi en liberte, mar queres beza fur,
Te dremenno deio a joa, a blijadur.

44. Piou a ouffe nombrí medalenno, croajo,
Distribuet en Franç ? — Houi seul, personnajo
A bep sex, a bep oad, a bep renc, *meritant*,
Balamour d'ho vertu ha d'ho tevouamant.

45. Victimo an tan goal a Faubourg Sant-Anton,
Houi dle beza constant deus Louis-Napoleon ;
Mil livr ar memeus dorn diganta neus touchet :
A hent all, ar hollo zo bet tout reparet.

46. Impalaër generus, just eo an nation
O cavet en he Prinç, objet mil ovation :
Houi, arco a drionph, fleurio, quen eloquant,
Deus ar rest he verit am dispans da barlant.

47. Peerien an truañ, bezit consolation ;
Ar Camp a diminu ho contribution ;
Hep dont da neglija hini ar servijo :
Mez, cresq zo necesser, en certen andrejo.

48. Tremenomp a speret bars ar guer Eternel ;
Saludomp monumant ar soudardet fidel
A neus scuillet ho goad vit ar religion
Ha hadplacet ar Pap, Pi Noavet, voar he drôn !

49. Clevit darn a gomzo coz brezeller Alger,
Adresset da Doue, da Franç, d'hon Impalaër :
« Meulomp Doue unic ! dreiza, Napoleon,
» Bezit victorius, en peb occasion.

» 50. Me eo Abd-er-Kader, mab da Vahhi-El-Dèn ;
» Trugarez da veza gret terri ma chaden :
» Dre Doue, mestr ar bed, a toñan dec'h, Autro,
» Mui vit den all abet, ma halon ho caro.

51. « Test hon deus grandeur Franç, deus a ners ho trouple :
» Immans eo, er vro-ma, ar pinvidigenez !
» Bezo peus chefo just, env en peb action :
» Met Doue, oll buissant n'all ranversi ho trôn.

52. » Deus he beurs ra vezo ar garante cresquet
» Evidoc'h, en calon ho brassa mignonet ;
» Ouspen a renetan ma vo leun a doujans
» Hoc'h oll ennemiet ; vit ober bonheur Franç !

53. « Permettet din confian ebars hoc'h amitie,
» Hac adressi veüio vit ho prosperite :
» Renouvelin a ran dec'h ive ma sermant,
» Pehini a virin, hep manç, fidelamant ! »

54. Daou Impalaërdet Franç, leun a avantajo,
Houi laqua en defot oll bouvoar ma homzo :
Dister eo ma savoar, divalo ma speret
Vit treti, vel ma fot, quen important sujet.

55. Consultet alies ar rapport eloquant,
Carguet a interest, deus quenta President
A cour appel Paris, d'ar senat presentet,
Ar hoc'hvet a vis du diveza tremenet.

56. Demeus ar *Moniteur* hastit quemer lectur :
Nombr a buissanço enna, gant plijadur,
A declar anavout titr chef ar Francigen
En Napoleon Tri, couls hac he gurunen.

57. Dre inspiration an Autrou Souveren,
Sir ! houi orn ho palez demeus eur feumeulen
Dign deus ho renc huel : he vertu, he charmo
A ajouto bemde ous eclat hoc'h hano.

58. Ra vezo biniguet mil guech eun union
Quen agreabl d'ar bopl en admiration !
Proposomp vit boquet : *peuc'h, joa, prosperite*,
Hac, evit bonheur Franç, *eur guir bosterite !*

59. Entreomp, sujetet, ramplissomp hon dever
En andret Bonapart, hon Trivet Impalaër :
Bezomp fidel deza, hac imploromp an Ee,
Vit ma houarno mad ar vro hac ar hontre.

60. Heuilomp gourc'hemenno an Tad Celestiel,
Ha, hep poan nin blego d'hon chefo temporel :
Ar soumission-ze da Doue, da Cesar,
Herve an Aviel, vo curunet en Gloar.